



# Buhez ar c'hlas (2vet)

## La vie de la classe

### ⊙ roll ar penn gelenner-ez

Dezhañ eo da reoliañ buhez ar c'hlasad war an dachenn bedagogel :

- Kelaouiñ a ra al liseidi war kement tra a sell ouzh mont en dro al lise.
- Selaou a ra ar c'hlasad a-stroll pe a hiniennoù
- Kuzuliañ a ra pep lisead war e labour ha war an hentañ.
- Ober a ra al liamm etre ar renerezh hag al liseidi.
- Merañ a ra an darempredoù gant ar gerent.

### ⊙ Petra ober pa sav ur gudenn

#### war ar c'helenn ?

- 1- Al lisead/ez gant diaesterioù en un danvez a rank mont e darempred gant ar c'helenn/ez.
- 2- Pa sav ur gudenn a-stroll ez a ar gannaded-klas e darempred gant ar penngelenner/ez. N'emañ ket er c'huzul klas e vez diskoulmet seurt aferioù.
- 3- A-benn kaout kuzulioù, kaout respontoù da c'houlennoù a sell ouzh ar c'helenn e vez aliet ar gerent da vont e darempred gant ar penngelenner/ez pe gant ar renerezh.
- 4- Pa n'eus bet kavet diskoulm ebet d'ur gudenn e live ar c'hlasad e teu ar rener da vezañ e karg da zivizout.

### ⊙ Le rôle du professeur principal

*Il coordonne la vie de la classe sur le plan pédagogique :*

- *informations générales sur le fonctionnement du lycée,*
- *écoute collective de la classe et écoute individuelle,*
- *conseils sur le travail et l'orientation,*
- *lien entre direction et élèves,*
- *gestion des relations avec les parents.*

### ⊙ Que faire en cas de problème ?

- 1- *Un élève en difficulté dans une matière doit rencontrer le professeur concerné.*
- 2- *en cas de problème collectif : la classe interpelle les délégués élèves et le professeur principal. Le conseil de classe n'est pas le lieu où se résolvent les problèmes de ce genre.*
- 3- *Pour tout conseil, toute préoccupation concernant le travail scolaire et l'enseignement, il est conseillé aux parents de s'adresser au professeur principal.*
- 4- *Il appartient au directeur de prendre les décisions en cas de difficulté majeure au niveau d'une classe.*

### ⊙ An hentañ

Ur bloavezh-hentañ eo an eilvet klas :

- Trimiziad kentañ. E-pad ar c'huzul-klas e vez priziet al labour, ar barregezhioù hag an emrenerezh.
- Eil trimiziad. Pep familh a urzhio dibaboù evit an hentañ : dibab un hent micherel, eilañ, tremen en ur C'hentañ klas en ur resisaat an arbennikadurioù (teknologel pe hollek). Kuzuliet e vez al lisead gant ar penngelenner/ez. Diouzh al live labour ha barregezhioù e vez roet un ali kentañ gant ar c'huzul.
- Trede trimiziad. Ur c'huzulhentañ eo ar c'huzul-klas diwezhañ. Reiñ a ra un ali war goulennoù urzhiet ar familhoù. Pa 'z a a-du ar familh gant an ali e teu da vezañ un diviz. Pa ne 'z a ket a-du e rank kaout un emgav gant ar rener. Hemañ a c'hell pe gadarnaat ar c'hinnig kentañ pe dont en-dro warnañ. Pa n'eus emglev ebet e rank ar familh ober galv. An trede trimiziad a rank kas da gadarnaat ar barregezhioù tizhet, ar spered labour, an emrenerezh.

NB : E-pad an eurvezhioù heuliañ-hentañ e vez skoazellet al lisead evit e breder war an hentañ.

### L'orientation

*La seconde est une année d'orientation :*

- *Premier trimestre. Le conseil de classe évalue le travail, les compétences et l'autonomie.*
- *Deuxième trimestre. La famille formule des choix hiérarchisés concernant l'orientation : voie professionnelle, redoublement, choix de spécialités en classe de première générale ou technologique. Le conseil de classe donne un premier avis en fonction des résultats, du travail et de l'attitude.*
- *Troisième trimestre. Le troisième conseil de classe est un conseil d'orientation. Le conseil se positionne sur la demande des familles. En cas d'accord, la proposition devient décision. En cas de désaccord, la famille doit demander un rendez-vous avec le Chef d'établissement. Celui-ci peut revenir sur la proposition ou la confirmer. Il reste alors la possibilité de faire appel. Le troisième trimestre doit confirmer les compétences acquises, la capacité de travail, l'autonomie.*

NB : Les heures d'accompagnement personnalisé permettent d'aider les jeunes dans leur réflexion d'orientation.

### ⊙ Dileuridi ar gerent er c'huzul-klas

Pedet e vez ar familhoù da vont e darempred gant dileuridi ar gerent pa vez afer.

### Délégués parents aux conseils de classe

*Les familles peuvent se rapprocher des parents délégués.*

### ⊙ Studi evezhiet

Da vare ar c'huzul kreiz-trimiziad e c'hello ar skipailh aliañ liseidi 'zo da vont d'ar studi evezhiet da noz, a-benn sikour anezho da labourat en ul lec'h sioul ha da labourat ingal war ar sizhun. (*s.o follenn mont en-dro ar studi*).

**Etude surveillée** *Lors du conseil de mi-trimestre, les enseignants seront amenés à conseiller à certains élèves d'aller en étude surveillée, afin d'aider les lycéens à travailler dans un endroit calme et à organiser leur travail. (voir la feuille le fonctionnement de l'étude)*

Goude an emgavioù-mañ e vo kaset d'ar familhoù ur renabl eus an doareoù da vont e darempred kement gant ar skipailh pedagogel ha gant dileuridi ar gerent d'ar c'huzulioù-klas, d'ar c'huzul-lise ha d'ar bodadoù bod ha boued.

Le lycée fera parvenir, sous peu, aux familles les coordonnées et les modalités de contact de l'équipe pédagogique et des délégués parents tant aux conseils de classe qu'au conseil de lycée et commissions repas et hébergement.



# ar rann european

## LA SECTION EUROPEENNE

### ⊙ Raktres pedagogel lise Diwan

Unan eus palioù al lise a zo **skoazellañ an holl liseidi da vont war-raok gant ar yezhoù estren** : bout en o aes evit eskemm er yezh, anavezout gwelloc'h sevenadur broioù all hag all... Beajoù a vez aozet gant ar skipailh pedagogel evit al liseidi (da Vro-Euskadi, da Vro-Gembre, da Vro-Alamagn, da Vro-Skos...). Degemeret e vez ivez liseidi o tont eus broioù all el lise (kenskriverien).

### ⊙ Le projet pédagogique du lycée Diwan

Un des objectifs du lycée est de **promouvoir l'enseignement des langues étrangères auprès de l'ensemble des jeunes : communiquer dans la langue étrangère, ouverture aux cultures... L'équipe pédagogique du lycée organise des voyages à l'étranger pour les lycéens (au Pays Basque, au Pays de Galles, en Écosse, en Allemagne...)**. Des correspondants étrangers sont également accueillis par nos lycéens.

### ⊙ Ar rann european

Termetet eo ar rann european gant :  
- **ur yezh : ar saozneg an hini 'vo**  
- **un danvez kelennet e yezh estren : an SVD (kelenn skiantel e 1añ ha term)**. Labourer e vo war Skiantoù ar Vuhez hag an Douar e Saozneg, evit ul lodenn eus ar program d'an nebeutañ. Evit ar vachelouriezh e vez ar memes arnodennoù hag ar re all evit an SVD e galleg hag evit ar saozneg. Un arnodenn all ouzhpenn a vo tremenet ganto : un arnodenn SVD e Saozneg dre gomz.  
Tu zo da gaout ur meneg « rann european » gant ma vefe bet tapet 12/20 d'an nebeutañ a geidenn e Saozneg (arnodenn voutin), ha 10/20 er briziadenn ouzhpenn war an SVD e Saozneg e dibenn ar bloavezh termen. (arnodenn DNL).

### ⊙ La section européenne

Une section européenne se définit par - une langue étrangère : il s'agira de l'anglais - une discipline non linguistique : les SVT (enseignement scientifique en 1ère et term). Une partie au moins du programme de SVT sera enseignée en anglais.  
Les épreuves du baccalauréat seront les mêmes pour les élèves de section européenne que pour les autres pour les SVT en français et pour l'anglais. Ils auront également une évaluation spécifique : une épreuve de SVT en anglais (épreuve DNL). Une mention « section européenne » est attribuée à condition de satisfaire aux conditions suivantes : obtenir une note égale ou supérieure à 12 en anglais (moyenne 1ère et term) et obtenir une note au moins égale à 10 pour l'évaluation

spécifique proposée aux élèves de section européenne en fin d'année de term.

### ⊙ Evit piv neuze ?

Dibab ar rann European en eilvet klas a dalv bout mennet evit labourat startoc'h c'hoazh e saozneg ha strivañ a-benn kaozeal ingal er yezh-mañ e-pad ar prantadoù kelennet e Saozneg (SVD e 2vet ha kelenn skiantel e 1añ ha term).

Evel an holl liseidi all e c'hello ar re dibabet ar rann european en eilvet klas gante mont war-zu forzh peseurt arbennikadur.

Evezhiadenn : N'eo ket ur c'hlas european a vo met liseidi eus meur a glas a vo bodet evit ar prantadoù SVD e saozneg.

### ⊙ Les élèves concernés

Choisir la section Européenne signifie être motivé : approfondir d'avantage encore le travail en anglais et faire des efforts pour utiliser la langue pendant les cours de la discipline non linguistique (SVT et enseignement scientifique en 1ère et en term). Les élèves ayant choisi la section européenne auront le même choix d'orientation que les autres secondes. Remarque : Il s'agit bien d'une section européenne et non d'une classe européenne. La section européenne rassemblera des élèves issus de plusieurs classes.

## ★ Reform al lise

E fin ar bloavezh eilvet e rank da bep lisead dibab 3 danvez arbennikaat e-touez an 8 danvez kinniget el lise.

En fin de seconde, les lycéens devront choisir 3 spécialités parmi les 8 proposées au lycée.

